

KANTIK AN TAD MANER (1)

18^e mode celtique diatonique.

COMPLAINTE.

Meulomp ar c'halon Breizonek Meulomp an Tad Maner
 Meulomp mignañ mamm Doue, ha mignañ hon salver
 Er vro-man gant karanterez er deus kalz labourer
 Pedomp pedomp Breizonek an Tad Mat beuziget

DISKAN

Meulomp, meulomp, Bretoned, meulomp an Tad Maner,
 Meulomp mignañ mamm Doue ha mignañ hon salver.
 Er vro-man gant karanterez en deus kalz labourer,
 Pedomp, pedomp, Bretoned, an Tad Mat benigez.

ROZIOU

1. Da iliz skolach Kemper, e galon 'zo kaset,
 En iliz parrez Plevin e gorf 'zo interet;
 En e yec'hed en devoa alies lavarret :
 E lech' ma kouez ar wezenn e renk bezan lezet.
2. Pa zeuje dre ar maro Jezuz Krist d'hen gervel,
 Gant ar bobl paour en devoa bet dezirel mervel :
 « Ganto am cus tremenet, emezan, ma buhez,
 « Ganto goude ar maro e karten chom ivez. »
3. Tavit eta, pobl a Vreiz, 'n'en em c'hlaç'hariñ ket ;
 Ho pedenn d'an Tad Maner en deus Doue klevet ;
 En ho kreiz ez eo chomet, evl ho freazi,
 En ho korf hag en hoeh' eue, dre Jezuz ha Mari.
4. Komanset mat en deves an eil hag egile :
 Abenn nemeur e lennot skrivet en e vuhez
 Da bot den klanv en deves e pep kanton gweliet,
 Dreist ar re all, e Plevin, d'ar re 'ya d'hen gweliet.
5. Gindidik na a Sant-Tori, en Eskopti Ronzon,
 Peder leo diouz Fougeret, peder diouz Pontorson,
 Hogen choazet gant Doue, an abostol fidel,
 Evit deski hent an Nenn d'an holl e Breiz Izel.
6. Ne oa nemet trizek vloaz, o komans e studi,
 Pa lavaras Dom Mikael Noblez dre brotesti :
 Megan 'rer din eur peskig en Eskopti Ronzon,
 A zeuy souden da vro Breiz da ober mision.
7. Pa rene bempvet klas er skolach a Gemper
 E teuas Mikael Noblez da welet e vab ker,
 Hag e komzas eus Andre hag eus e vreur Simon
 Paz o galvas hon Salver da ober mision.
8. En distro e lavaras da Zouarneneziz :
 Gant gras Doue, c'hw'i 'welo c'hoaz mision e Breiz ;
 Choazet em eus an hini, dre c'hourflemenn Doue,
 A dle ober mision er vro-man, em goude.

(1) Cette complainte, composée par le P. Martin à la mort du P. Mannoir, est très ancienne et spécifiquement bretonne. Respectez-en le rythme et la modalité qui nous viennent du fond des âges.

9. Ne lavaras ket dezian neuze c'hoaz Dom Mikael,
 Ez oa choazet gant Doue da zeski Breiz Izel ;
 Mel Doue a zisklerias dezan e volonteiz
 Pa'z eas eun deiz d'ar chapel anvet Ti Mamm Doue.

10. Etre Kroaz-ar-Gardien ha maner Kermorvan
 E roas ar Spered Ghan eur sklerien dezian,
 Dre behni e welas eus Breiz ar c'hartierion
 Da bere oa ret dezian mont da glask eneon.

11. Pa'z antreas e chapel ar Werc'hez hon Itron
 En em ofras holl dezi a gorf hag a galon :
 « Prest ha pront on, emezan, da sikour ma Salver,
 « Da zistrel ar bec'herien 'zo koustet dezian ker. »

12. Ho pet koun, Gwerchez santel, eus ho misioner :
 En ho ti, d'ar mision 'n em ro an Tad Maner,
 En ho ti eo komanset, ganeoc'h e kendalc'ho,
 En ho ti gant gras Doue, eun deiz e finiso.

13. E-bartz ar gêr a Vourjuz pa oa abandonet,
 En eur c'hlenved diremed gant ar vedistined,
 Deiz Nedeleg, kent resev sakramant an Aoler ;
 En em westlas evel-henn e presans e Salver :

14. « Jezuz, Mari, sant Erwan, hag Aelz Breiz Izel,
 « Mar rent Doue din yec'hed, me yel bele mervel,
 « Da ober ar mision e mesk ar Yveloned ;
 « Me hen promet a dra sur, gant eur galon barlet. »

15. Doue a gomzas outan en eur sakramanti
 Hag a lavaras dezan : Pare viot hep si,
 Me a gontanto ivez dezir bras ho kalon,
 Ha me ho kaso da Vreiz da ober Mision.

16. En amzer-se, eun nozvez, dre e gonisk e sonje
 E touge war choug e goin eur peizant a Gerne,
 Evel sant Fransez Zavier a sonjas e touge
 Eun Indian, kent monet e mision d'ar vro-se.

17. Kourach eta, Kerneviz, eun deiz d'ar Baradoz,
 An Tad Maner ho longo evl biten repoz ;
 Ha kalz a Ronzon, Gwened, Sant Brieg, Leon, Dol,
 Hag a Dreger a viro ned ant ket da goll.

18. Me a glev' sant Kaourintin, dija ouz ho kervel,
 Tad Maner ha Tad Bernard, kompagnuned fidel :
 « Deut war ma lech, emezan, n'ho kray pesketerien
 « A galz a bec'herized ha kalz a bec'herien. »

19. M'o gwel o daou o nijal dreist ar mor pirihus,
 Da beskeia ez eont eneou da Jezuz :
 Bel int dija e Brihat, Sizan hag euz Groa,
 E Molenez hag Eusa, enez Tudi ha Bra.

20. Eun troad o deus war ar mor, eun all war an douar :
 A gannedon bras ez eont en noz evl al loar,
 Hag en deiz evel an heol, ha dre o sklerien
 E chasont eus a Vreiz ar gwall devaljenn.

21. Eus an Tad Maner er a ar vrud e pep kanton,
 E pep lech hen goulenner da ober mision :
 Au eskibien hen goulenner, personed, beleien,
 Aotronez, itronezed, tud paour, ha bourethizien.

22. Pion a oufe lavarret e pet lech ez eo bet,
 Ha pet pecher e pep lech en deves distroet ?
 Aesoc'h eo kont ar stered, pa vez sklaer an noz,
 Evit an dud en deves kaset d'ar Baradoz.

23. C'hw'it hen goar, o ma Salver, c'hw'it hooc'h eus sur kontet
 Pet den dre e sermioner en deus savelet,
 Pet dre profesion a bec'herien mezet,
 Pet dre ar broseston a bec'herien dallet.

24. N'hou eus ket kollet hon Tad, ganimp eman bepred,
 Mar 'd omp dispartit a gorf, ned omp ket a spered ;
 Lezet en deus kent mervel ganimp holl e galon,
 Eus an neuv e ro dimp-ni e vendikision.

25. T'voit eta war Vreiziz, eur sell a drugarez,
 Tad Mat, e kreiz hon anken, roit dimp levenez,
 Ha ra seladomp bepred ho mouez ouz hon gervel,
 War ho lech, war hent Jezuz, d'ar vhez peurbadel.